

### Aliedig Lonjer.

Bretonned a vreiz isel beleïen a noblanç  
 Deud da chelaou kanan eur wers a zo a konsekânç  
 groed da Epliedik lonjer da verc'h eur vechantez  
 an deveus groet gwel blawez faut kelenadurez

Tro Doue aliedik pebeus crim a c'heus groet  
 O lahan daou krouadur eb bean badeet  
 Mar kacher bean fiet en providanç an env  
 C'hwi piye sovetaet ine an daou bugel ze.

Chwi piye sovetaet ine an daou krouadur  
 A zo deud var an douer divar an avantur

Pa arrias an archerien wit e komer en ti  
 Ne devoa ked a galon ewid parlant outi  
 Med e mam, ar vechantes, en e flaç a komzaz  
 Ma merc'h a zo accuzet dre valiç a dre kaç

An archerien pa kleochont eni a zo kroget  
 E daouern adreg gein dezi an deus staget  
 E daouern adreg e c'hein dezi an deus staget  
 ag e mam kerkent a c'hi gant Kerden garotet.

Ag e mam kerkent a c'hi gant Kerden garotet  
 A dar prison da raont int a voe konduet.

Alied a levele deus prenest ar prizon  
 Jesus Salwer adorabl a c'harzo em c'halon  
 Me a wel arri an eur ag arri ar momet  
 Wid sovetat ma ine klesket din eur beleg.

Ar Soleriez pa klevas en ker e zo bed ed  
 eur beleg a deus klasket da koves Alied  
 Alied a kovesse bete n'heur diwoean  
 e mam voa er c'hoste all a felfoa dei kargan.

Med pa voelas ar beleg penos e voa karget  
 eun umach kresufier dei an eus prezantet  
 setu aman Aliedik zo ewid om oll marvoet  
 na biskoas var e maro den nan deus tamalet.

Ma keret Aliedik na lerefet guir o mam  
Chwi haio dirag Jesus divar ar bed divlam.

Me voar er vad emezi ewid oll marvet  
Med a trugare Doue muntrerez nan non ked.

Na voa ked o guir gante na c'hoas peurachuet  
Ar b(o)ureo deus a raon zo er prison entreet  
A gantan bars en e zorn paperassou pleget  
Chetu aman Aliedik o setenç o harret.

Chetu aman Aliedik o sentenç o harret  
Dar prison da pontreo chwi a vo konduet.  
ewit monet da krougan da graïo sant thomas  
Elec'h ma voeet gwelet gant ar bob bihan a bras

ag ar bob bihan a bras Alied a(1) goelo  
Ag o mam dre er c'hloar doue aï dar ger pa garo

Aliedik a lere deus prenestr ar prizon  
Jesus Salwer adorabl klahar zo em c'halon  
Me wel ar c'hargo fagot mont gant ru sant thomas  
ken ma vo kres de sonnet me mo senter ma goaz

me wel a c'hargo fagot mont gant ar ru en traou  
ken ma vo kresde anter me vo ludu a glaou.

Ne woa ked e guir ganti c'hoas peurachuet  
Ar bourreo deus a raon zo er prison entreet  
ag en plass e boulouzen ar gorden a lakas  
ewid e c'has da gro(u)ga da(2) graïo sant thomas

Pa pigne aliedik pa pigne bars er skeul  
eur beleg kerkent a c'hi a c'ha ganti de heul  
eur religius santel a ha kerkent a hi  
A gantan bars en e zorn umaj ar c'hrusufi

Setu aman Aliedik zo ewid om oll marvet  
a biskoas var e maro den na neus tamalet  
Me voar erva emezi e ewidon oll marvet  
med a trugare doue muntrerez nan don ked

A goude ma woe krouget war chariot laked  
 Dre pever c'horn ruio ker alied zo treinet  
 Dre pewer c'horn ruio ker alied zo treinet  
 Groet eun tantet tan horrus ebars eo strinket.

Groet eun tantet tan horrus ma voe strinket ebars  
 Oll pelerinet santel komeromp oll kourach  
 Me o ped pelerinet deud er plass man gant joa  
 Rag bea deus oraço distribui a ra.

Rag bed e deus ar pouvoar digant salwer ar bed  
 Neb a houl a galon e ro de ar yerc'het. (3)

**Madeleine.**

(1) Peut-être faut-il lire :o ?

(2) l'a (de : da), écrit en surcharge sur : ar (d'abord : dar).

(3) Ces deux derniers vers sont écrits dans la marge gauche, transversalement (de haut en bas).